

Dastunad Pennwern : dornskrid 89

## 88. AN TROKERIEN GROAGE

( follennoù 260 - 261 )

Sillaouit kana me o ped  
eur chanson nevez komposet.

—  
A zo greet da eun tailler,  
Da eun osac'h iaouank miliner.

—  
Diziou molarjez divea  
he teujont o taou da c'heva.

—  
Da cheva gwin ruz a gwin guen  
Ma saw eur banne en ho fen

—  
- Ma greg zo vil (me ar miliner), na plij ket din  
pe ne de koant vel ta hini

—  
Er foar vaze er Menebre  
e klevan he trouker grage.

—  
Bras ar menez ma ve gwir se  
Ma na ve karget an deiz se.

—  
Ma voa kemenet ho krage  
Da zonnet d'ho c'haout an deiz-se

—  
Da zonnet da kaout an daou c'hlient  
Da c'houde hag hi a vije kontant.

—  
Greg ar miliner a voële,  
a greg an tailler a c'hoarze :

—  
Gret ho c'haffer, melinerez,  
Me ne don mui kemenerez.

~~~~~  
vvvvvvv

Moris Follezour 2 janv. 1851

~~~~~  
vvvvvvvvvvv